

Dornskridoù Milin: Kanaouennoù

## 84. LES NAUFRAGES DE LANDEDA

1. Selaouit kana me o ped  
eur verz a nevez koumpozed, bis  
great var zujed an dud veuzed.
2. C'hoezek oant eat en eur vagad  
d'an Diouris da vit koat  
da Droumpou ar Roue da Sezoun  
Klêvet a reod pebez eztoun
- (3). Lavared en d'oa gread Iannik Kola,  
en deiz dezo aliez a veach,  
Lakid o pâg, a ben e Kameled  
aoun braz am euz na veac'h beuzet.
4. I a grye hak a gane  
ni d'en d'oump ket potred Plougerne  
ma vije bet ar re ze er vâg man  
a vije hreman o krena.
5. Eun truez braz oa klewed ar c'hri  
a rea an dud keiz o veuzi  
hak i o krial oc'h Doue  
da c'houlen Baradoz d'ho ene.
6. Eur manac'h a gouent an (Elez)  
a yoa o pourmen en e verjez  
hak a yeaz diouc'h ar c'hri  
d'an aod evid o Absolvi
7. Intron varia an dreinded !...  
O c'hoezek en deveuz absolved  
roet dezo an absolver jeneral  
Kredit en devoa kalz a c'hlac'hар.
8. Euz a vourg plougerne e veze goefet  
an tan en aod en noz ze  
o veilla gant ar c'hoezek den beuzed  
glac'hар oa d'o Intañvezed.

9. An intanvezed eo a goële  
na gävent den o c'honsolje  
pephini o vouëla de bried  
beza oa kalz o doa minored.

10. Pevarzek a yoa euz ar reze  
pere o devoa bugale  
an daou all a yoa nevez demezed  
er Iaoû tremen oa bet o eured.

11. Daouzek er c'heur a yoa laked  
pevar dre dud a voa douged bis  
da vont da enterri d'ar vered.

12. E Landeda pa int errued  
ar veleyen kana ne ellent ket  
nemet an aoutrou 'r c'hôd a blougerne  
ennez a gane gant gras Doue.

13. E Landeda m'ar d'oc'hui bet  
ar c'hroaziou eno oc'h euz goeled  
emaint eno tro var dro d'ar vered  
var ben beziou an dud veuzed.

vvvvvvvvvv